

OH EOSTEK.

298

Allegro vivace. sol do ré ré

Gwrég yaou-ank a zant ma-lo deh ; gwrég yaou-ank

sol sol do ré ré sol fa

a zant ma-lo deh 'nhe fe-nestr a oue-le d'an neh.

solm lam rém

'n he fe- nestr a oue- le d'an neh.

A N E O S T I G
(Le Rossignol)

- 1 - Gwreg yaouank a Zant Malo, deh,
'N he frenest a ouele, d'an neh :
- 2 - Siwaz ! Siwaz ! me 'zo tizet !
Va eostig paour a zo lazet !
- 3 - Lavarit din, va gwrég nevez,
Perag 'ta 'savit kel liez ?
- 4 - Ma savan, dén ker, evel--se,
E-kreiz an noz euz va gwele,
- 5 - Da eo ganin, setu, gweled,
Al listri braz o vond-doned.
- 6 - N'eo ket, avâd, evid eul lestr,
Ez it kel liez d'ar prenest ...
- 7 - Sevel a ran da vond da zell
Ouz va bugel èn e gavell.
- 8 - N'eo ket geier a fell din !
Perag e savit diouzin ?
- 9 - Va denig koz ma ne fachez,
Me 'lavaro ar wirionez.
- 10- Eun eostig a glevan bep noz,
Er jardin war eur bodig roz...
- 11- Pe ma 'z eo gwir, pe ne deo ket,
An eostig-se a vo paket.
- 12- Jardinour mad, sentit ouzin,
Eun dra a zo 'ra glahar din,
- 13- Er harz ez eus eun eostig noz,
Ne ra nemed kana èn noz.
- 14- Ar jardinour p'en-deus klevet,
Eun tammig las en-deus stignet.
- 15- Hag an eostig en-deus paket
Ha d'e Aotrou deus hen kaset.
- 16- Hag an Aotrou pa hen dalhas,
A-walh e galon a c'hoarzas.
- 17- Hag e vougas, hag e daolas,
War barlenn wenn an Itron geaz.
- 18- Dalit, dalit, va gwreg yaouank,
Setu amañ hoh eostig koant.
- 19- He dén yaouank, dal ma klevas,
Gand glahar vraz a lavar as.
- 20- Setu ma dous ha me tizet,
Ne hallim mui èn em weled...